

## Fichier 1

### GWERZ MARGOD AR BIK ; AR PLAC'H FAEUZ \*

*War dòn : Petra zo neve e ker-Iz ?*

#### I

Anaoud a rit — piou na ra ket ? —

Margod ar bik, a Ger-Biget.

Eur chrac'hik kromm ha bargevez

Vel ma vi te, Fant skrignerez ?

Houn-nez zo bet eur bompinen,

Eur plac'h a dan, mistr ha kempen,

Lemm a spered, lemm a lagad,

Ha pennherez dreist ar marc'had.

Faeuz e ioa, ha faeuz braz !

« Mar kemerann, emezi, eur goaz,

« Ho renk kaout nerz ha koantiri,

« Teod eur c'hloarec, stumm eur pipi.

« Eur galonn domm heb boutou berr,

« Reiz a zentuz e peb amzer ;

« A wenn vad he renko beza,

« Gant eun tamm brao a peadra . »

Kement si vad renkje kavet,

Si fall ebed, pe netra c'hret,

Eun den vel n'euz na vo biken —

Eal da huvre, Madalen !

## II

Tostaad a ra potret furod

D'ober astellic da Vargod,

Tud a zanve, koant, stummet mad...

Ar plac'h ne gav hini d'he grad.

« Ato ! me dimi d'ar seurt-se !

« Trelated int, zod-nai, ma fe !

« Sell Iann, gant he fri minaouet

« Fanch, ann daoulagat dilavet

« Loïzic, eul logoden vian ;

« Job, eur gueneuden dreud ha moan :

« Heman pladen vel eur loue,

« Hennez ker feulz hag eur c'hole ! »

### III

Pa oant skuiz oc'h huanadi,  
Int skampet, hini ha hini.  
Neuze tosta potret teuskoc'h,  
Daou intaou loued, eur zeller moc'h....  
Margod a ziroll da c'hoarzin  
Gand neusiou kroug, dirag ho min.  
« Ne lakinn ket ac'han da bell,  
Spillou da goef zantez Kated. »

### IV

Ann oad a zeu, keno genet !  
He bleo zo griz, he bek ridet,  
N'heller ket, siouaz, nevez  
Beg eur plac'h koz vel tal eun ti !  
Ar mellezour, ar c'hloc'h, bemdez,  
A lavar d'hei : « Dimez ! dimez ! »  
Ar big a grog enn he skouarn.

Ho ! mill bennoz d'ann henn houarn !

Kaved e deuz eur *cheminod*

Tord, jilgamm, luch ha divalo

Eul lountrek, paour evel eur raz,

En em ginnig a renkas c'hoaz.

V

Penaoz he kavit ar gentel,

Merc'hed breuriez santez Katel ?

Ha c'houi, gragez *cheminoed*,

P'euz ket a geuz d'ar Vretouned ?

*Prosper PROUX*

*Le Citoyen*, 8 mai 1930.

\* Transcription par Trebor Rehral

---

